

YEZH HA DUDI

(Evit ar grennarded)

Obererezhioù a vo kinniget a-hed ar sizhun d'ar grennarded :

Diouzh ar mintin

C'hoarioù pedagogel gant Sten Charbonneau ha Kristin Marichal a lakao izili ar strollad da wellaat o implij eus ar yezh.

Goude kreisteiz

Ar c'heleier er radio

Labouret e vo war ar c'heleier er radio, gant daou zen a-vicher eus bed ar radio.

Displeget e vo diazezoù ar c'helaouiñ dre skingomz, an doareoù liesseurt a zo da sevel pennadoù da vezañ skingaset war-lerc'h, diouzh ma 'z int "kelachoù" (berr-tre), pennadoù a c'hell bezañ prientet en a-raok hag enrollet, pe lennet war-eeun, pennadoù aterset, ha kement 'zo...

Liesseurt e vo al labour d'ober eta. Pep tra 'vez skrivet en ur mod tost kenañ deus ar yezh komzet. Desket e vo enrollañ, didroc'hañ, frammañ ar pennadoù kaoz. Desket e vo penaos mestroniañ e vouezh evit ma vefe plijus da selaou.